

TÉLEN ANN ARVOR

PK

KANAOUENNOU

GANT

BRIZEUX.

★
E PARIS,
LÉKÉT É GWASKÉREZ GANT E. DUVERGER,
STRET VERNEUIL, 4.

★

I.

BARZONEK

PÉ

KANAOUEN AR VRÉTONED.

War don : *Ann hani gôz.*

Ni zô bépred

Brétoned,

Brétoned tûd kaled.

O ia! d'ar brézel paotred ter,
Paotred vâd ha séven er gher.

Ni zô bépred

Brétoned,

Brétoned tûd kaled.

Téc'het a ra Saôz penn-da-benn,
Pa lévéromp ni : « *torr hé benn!* »

Ni zô bépred

Brétoned,

Brétoned tûd kaled.

Hoghen, klevid enn eûreûjou,
Kanaouen skiltr ar biniou.

Ni zô bépred
Brétoned,
Brétoned tûd kaled.

O Breiz-Izel! ô kaéra brô!
Koad enn hé c'hreiz, môr enn hé zrô!

Ni zô bépred
Brétoned
Brétoned tûd kaled.

Allas! mar tléann Breiz kuitât,
 Mé wêlô gant ma daou-lagad.

Ni zô bépred
 Brétoned,
 Brétoned tûd kaled.

Mirit, breûdeûr kéz, hô penn-bâz,
 Hô pléô hîr, hô pragou-brâz.

Ni zô bépred
 Brétoned,
 Brétoned tûd kaled.

Gourennit m'ad! Eur gourenner
 En deûz kalon ar merc'hed kaer.

Ni zô bépred
 Brétoned,
 Brétoned tûd kaled.

—

Mé drouc'hô ma zéôd em bek
 Kent diziski ar brézonek.

Ni zô bépred
 Brétoned,
 Brétoned tûd kaled.

—

(1) arant de désapprendre

Karomp pep tra a zo e Breiz,
Karantez d'ed, karadeg brô!

madou en hi a zo e-leiz
Arvôrik kêz, douar derê!

Ni zô bépred

Brétoned,

Brétoned tûd kaled.


—

Koulskoudé, dreist ann holl vadou,
 Karomb ar C'hrist, Doué hon tadou.

Ni zô bépred

Brétoned,

Brétoned tûd kaled.



II.

AR BLEUN LANN.

War don : *Evnik a gan war goat huel.*

AR PLAC'H.

Hag é pé amzer évid on ,

Dén iaouank , é verv hô kalon ?

Klévit : pa ém' ar bleûn el lann ,

Pé ar bleûn mélen er balan ?

ANN DÉN IAOUANK.

Hô daou, vâd ! hô deûz bleûn mélen,
 Lann ha balan, koantik Elen ;
 Hoghen el lann éma, em c'hîz,
 Bleûn karet gand ar iaouankiz.

AR PLAC'H.

Ha pérak, va miñonik kéz,
 Lann en deûz bleûn a garantez ?

ANN DÉN IAOUANK.

Sétu pérak, miñonez ker :
 Lann en deûz bleûn é peb amzer.



III.

AL LIORZ.

War don :

Léz eul liorz dudiuz a oa hanter zigor,
Eur groac'h a lavaré ghîz-zé war toull ann ôr :
« Bokédou zô aman, va doué ! ha frouez !
« Ha traou mât da zibri ha da c'houésa ivez ! »


« Eul liorz all anavann, allaz ! eul liorsik dú :
 « Ann aotrou, pa zeûinn, a zigorô diouc'h-tû ;
 « Évid kousket didrouz eul lec'h don em bézô,
 « Eunn dén pinvik em harz martézé c'hourvézô. »

— Hoghen eunn dén fur brâz oa ô valé el liorz :

« Da bétra, va mamm gôz, é chomit-hu er porz ?

« Deuid em liorz, deuit ! mé a zô ann aotrou.

« Mamm gôz, dibrit frouez, c'houésaid ar vokédou. »



IV.

ANN DERO.

BARZONEK.

War don : *Teir c'haranté m'euz.*

Kanomb holl ann dero, roué ar c'hoajou brâz!

Kanomb holl, tûd iaouank, ha kanomb ar gwé glâz!

Krîz éo ann hini a drouc'h ann dervennd :

Allas! kément a wé é Breiz zô diskarret!

Ar gwé a zô santel ! Ar Gorriked , bemnoz ,
 A zeu da gorolli war drô ann derô kôz ;
 Hag ann Anaoun kéz , da sklerder al loar ,
 A skuill éno daélou , daélou war ann douar .

—

Gant hé zéliou stank brâz eunn derô kant bloasiad ,
 Ha gant hé vléô hîr war hé chouk eur Breiziad
 A zô ével daou vreûr : daou vreûr , hep laret gaou ,
 Leun a nerz ha vuhé , krenn ha kaled hô daou .

—

Gwélet em euz , é Skaër , eunn derô kenn huel
 A zavé enn évou hé vek dreist ann avel ;
 Eur gourenner ivé kenn stard em euz kavet
 En doa oc'h ann douar hé dreid gôzik staghet .


Tal va béz, tûd iaouank, c'houi lakai eunn derven,

Hag ann estik klemmuz a ganô war hé fenn :

« Brizeuk, ar barz mélen, aman a zô bésiet,

« Hen-nez a wîr galon garé ar Vrétoned. »

Miz éven 1837.



KOMSIYOU


PÉRE N'INT KÉD HÉVEL É PÉP LEC'H.

BARZ, — Kaner, pé ann hini a ra Kanaouennou.

BARZONEK, — Kanaouen vráz.

BREIZIAD, — Dén ghinidik eúz a Vreiz, pé Breton.

KOROLLI, — Dansal.



PAOTRED PLO-MEUR.

É KEMPER, É TÎ BLOT, MAB.

É Paris, gwasket gand, E. DUVERGER.

PAOTRED PLO-MEUR.

(É KERNÉ.)



Tûd iaouank, tûd glac'hared da guitaad ar vrô,
Kasit gan é-hoc'h, kasid ann espéranz atô :
Sklédi a rai war hô hend ével eur stéren gaer,
Ha dirâg hô taou-lagad pa zistrofod d'ar ger.

— Béz' ez oé eunn amzer all, eunn amzer dû ha kriz,
 Ann holl dûd iaouang a roé malloz d'hô iaouankiz,
 A rummadou d'ar Vrô-C'hall mond a réant peb bloaz,
 Allaz! né zistroent mui da Vreiz-Izel biskoaz!

Nann! énep lec'h eûz a Vreiz né wéleur ô valé
 Néméd ar ré vac'hañed, ré gôz, ha bugalé;
 Né oa gour da labourat na da vlénia ann hel;
 Ar grazez a éhanaz enn divéz da c'hénel.

Napoléon oa ar roué, ar gwîr vleiz a vrézel,
 Héb truez d'ar mammou paour a strapé hô bugel:
 Lavaret rêr er béd all éma enn eul iennad,
 Éma bétég hé c'hénou enn eur poull leûn a wâd.

(1) Des estopies -
 128 manche de la charue.

Pa oé hanvet ré Blô-meûr d'al lazérez vrâz-zé :

« Ar bleiz zô gand ann denved, émé-z-ind-hi neûzé!

« Ia ! ann droug a zô war-n-omp ! Dougomb éta hon droug;

« Ha d'al loengouez ha fêrô astennomb hor c'houzoug. »

D'ar béleg é léverzont : « Sétu deiz ann ankenn,

« Gwiskid ar stoll wenn ha dû évid hor binnigen; —

« D'hô c'herent : gwiskid ivez hô tillad kanv ha dû; —

« D'ar c'halvez : grid évid omp, grid eunn arched diouc'h-tû ! »

Tra spountuz ! dré ar parkou hag al lann oa gwéled

Ar zoudarded iaouank-zè ô tougen hô arched ;

Réna a réand-d'hô béz ha dira-z-hô ar c'haoun,

O kana gand ar bélek péden ann anaoun.

Meûr a zén garantézuz eûz ann holl dréviou
 Oa deûet gant goulou-koar, ar c'hloc'h hag ar c'hroaziou ;
 Daoulinet war léz ann hent eunn darn a lavaré :
 « It, Kristénien ! Evid hoc'h pédi a raimp Doué. »

E kreiz lan vrâz ar Gôz-ker, war lézen ar barrez,
 Choum a rèaz tûd ar c'haoun ; éno oé ann enkreiz :
 Enn arched é oa taoled hô bléô, hô gouriz,
 Hag ann holl c'haoun a ganaz neûzé : **DE PROFUNDIS !**

Ann tadou a hirvoudé, allaz ! hag ar mammou
 A strinké ô tifronka hô éné d'ann envou ;
 Ann holl étre hô divrec'h a c'halvé hô mipien :
 Hi, ével pa vent marô, né lavarent mui kén.

Enn eur zioulded gristen, hag hep selled adré,
 Kuïd ézond ô tilézel hô buhez gand Doué :
 A-héd ar wénojenou éz-éend daou-ha-daou,
 Ken trist hag ann anaoun, tristoc'h hep lâret gaou.

Gand Doué é-m'int, siouaz ! ha didân ann douar
 Hô eskern a zô gwennoc'h égéd ar goulou-koar,
 Ar gérent nec'hed ivez er béz zô diskenned :
 Ann tadou hag ar mipien, holl a zô tréméné !

— Tûd iaouank, tûd glac'hared da guitaad ar vrô,
 Ar péoc'h a zô er béd hag ar béd a zô braô,
 Id éta a galoun vâd é-pâd hô iaouankiz !
 C'houi a lavarô eunn deiz : gwéled em euz Paris !

Miz ébrel, 1859.

Gret gant BRIZEUX.

Ken trist hag am anson, tristoc'h hep lavar
A-hed ar wengonou et-geind daou-ha-daou
Kuid eoud e fuzel ho dinez gant Doue
Eun eur xouded griter, hag hep kelled arde, heb a c'hell

Am tadou hag ar migo, holl a xô tremped!
Ar gent ne' heb fvez er dex xô diskiped
Ho eskern a xô gverinnoc'h eged ar goulo-koar
Gand Doue e-m'int, siopax! ha d'eben am deuar

—Tud isouank, tud glac'hared da guttad ar vro,
Ar peoc'h a xô er bed hag ar ted a xô bras, a wober us
Id eis a kalon v'ed e-padho isouankidenn, e skirre
E'hoi a lavare eun deiz, gwelid eun eiz, e-padho
L'ez gant BRIZEL

SONIOU NÉVEZ.

I.

SON ANN NÉVEZ-AMZER.

EUNN TRÉMÉNIAD.

Sétu ann névez-amzer,
 Pé-trâ ganit-hu, méser?
 Méserik kéz, pé-trâ gan
 Al labousik war al lan ?

AR MÉSERIK.

Al labous gad lévénez
 Gan ha gan hé vignonez ;
 El lan , ével péb labous ,
 Péb méser a gan hé zous.

ANN TRÉMÉNIAD.

Gwell-a-zé ! Kanid ataô !

Né kéd hîr ann amzer vraô.
 Kanid mâd ha kanid stank,
 Laboused ha tûd iaouank.

II.

OTROU FLAMMIK.

WAR DON : *Folleziou Spaign.*

Sétu Otrou Flammik, gwisked flamm, gwisked kaer,
 Né kéd mui eur mésiad, né kéd c'hoaz eur pôtr ker.

Sellid hé ben toused, toused gand ar c'hrevier :
 N'en deuz kéd bléô hîr, n'en deûz kéd bléô ber.

Dond a ra eûz ar skôl, klévomb holl hé brézek :
 Né kéd mui brézounek ha né kéd c'hoaz gallek.

Fougéer ha direiz, war béb drâ grog hé zent :
 Goab a ra war ann diaol, goab a ra war ar zent.

Hanter-vâd, hanter-fall, sétu Otrou Flammik.
 Allas ! ann oanik gwenn a zô deût eul louarnik.

Sétu Otrou Flammik, gwisked flamm, gwisked kaer,
 Né kéd mui eur mésiad, né kéd c'hoaz eur potr ker.

III.

DA JESMI,

BARZ GWASKONN.

Barzik kéz, évid hon diwall,
 Lévéromp d'ar C'hallaoued fall :
 O kana Doué war ar mez
 Peb labousig en deûz hé voez.

GWERSOU SKRIVET WAR ZOR EUR MANER KOZ.

—
 Eur Gorrigan, é-pâd eunn nôz,

En deûz mé grét gand hénadoz.

WAR VEZ ANN AOTROU AR - GONIDEK.

Peûlvan, diskid d'ann holl hanô Ar-Gonidek,
Dén gwisiek ha dén fûr, tâd ar gwîr brézonek.

WAR DÎ ANN OTROU MALÔ KORRET.

LA TOUR D'Auvergn.

Klézé dir er brézel.
Lévrig aour em c'hastell.

A. B.

*Su Combas glaive d'acier,
Sourire d'or à mon foyer.*

